

## AN DAOU NEIZ

Diou lochennic dister, en eur guichen savet  
 Dindan ho zoen-zoul gant guéz bras goudoret,  
 A roe da zaou zen, groagez ha bugale  
 Bara du, patates, colo leun ar guele  
 N'o devoa, ar geiz ! evit souten ho buez  
 Nemet nerz ar goazet, ho foan hag ho furnez  
 Unan anezo. Yan, a veve dizourci.  
 « Ma ne vank, emezan, d'ar roz a d'al lili  
 Na gliz druz ar mintin, na bleun caer ho deliou  
 Petra helfe mankout d'ar re zo d'an Envou  
 Gant Mab Doue galvet ? » An eil, Thomas he hano,  
 He visaj du tonval, trist evel ar maro,  
 Thomas ar reuzeudic, na vel a zioud he henn  
 Na joa, na levez, nag eol, na stereden.  
 — Varc'hoas er guele cloz he gorf skuiz astennet  
 A vezo dizale gant an ankou samet.  
 « Kenavo, pried caret ! Bugale em zivad,  
 Piou roi dioc'h bara pa zounno breac'h ho tad ? »  
 Hag ar zonz-ze bemdez a red dre he spered  
 A grign, a zun, a zebr, evel eur preon-cuzet  
 H caloun ar frouez meur, he damig boeden-benn.

Eun dervez en he bark, he galoun en anken  
 Evel custum, e velas o vont hag o rodal  
 Daou laboussig bian, en eur c'hournjal,  
 En dro d'eur c'harzik spern, goloet a vleun guenn  
 Gourvezet varno sioul ouspen eur venanen  
 O listum vit ar goaav mel dous d'ar gestennad.  
 O velet-ze Thomas, eanet crenn da balat  
 A losk ar gourdi-yen, ar vuzugen trouc'hed  
 Gant dir he bal didruez da lein d'ar filipet  
 Goustad goustad e za varzug ar vojen nig :  
 En eur gichen tost tost hag etre daou vrangkig  
 E vel daou neiz, enno calz laboussidigour  
 Noaz-pill a droug-livet, o tont euz ho c'hlosson  
 Digor ho ginou ruz, cloz c'hoaz ha daoulagad  
 A c'hed digant ho mam eun tamig, eur begad

Distrei ra d'he labour, mæz euz al lætoun glaz  
 Gant ar gliz arc'hantet, bep an amzer Thomss  
 Etrezeg ar c'harz guenn, var he bal azezet  
 A dol he zaoulagad gant an daelou ruziet.  
 Tridal ra he galoun o velet an diou vam  
 O vont, o tont, o cass da bephini he dam  
 « Laboussigour tener, chouchet en eur gichen  
 Var blun flour ho cavel, bezit seder, laouen,  
 Netra d'oc'h na vanko ! » Mez euz costez ar mor  
 Kuezet evel eun tenn, he ziouaskel digor,  
 Eur sparfel dinatur a zam en he skillfou  
 Euz kichen he neizic, unan euz ar mamou  
 Leun he beg a vuzug ag a joa he c'haloun.  
 « Da derri va naoun du, c'hui zervicho, Introun,  
 C'hui rei eur pred lipous. » Eur glemaden skillrus  
 Dre an ear a dremen. mæs ne ket truezus  
 Cof goullou eur sparfel. « Echu eo ; minoret,  
 Goueit doureg d'ho mam, cetu c'hui dilezet,  
 Eme Dhoms. Varc'hoas dindan gliz ar mintin.  
 Gant ar riou, gant ar naoun, n'oun ket en em zivin,  
 C'hui vo cavel maro !... Ah ! va bugaligou  
 Ouzoc'h vezo hevel, mar deu falc'h an ankou  
 Re abred d'am diskar ! ». Rann galoun v'oa gueleit  
 He c'huezen, he zaelou mesk a mesk o redet  
 Paour keas Thomas !.. En noz ra repos na couskët  
 Na deu da zistana he galoun ankeniet.

Da c'houlou deis e sav, mall en deuz da c'houzout  
 Petra deut da veza da c'houde an darvoud  
 Al labousset displun. Var beg he voutou prenn  
 E sao sioul ag e seil eb touch ouz ar vojen.  
 Tra eston ! En daou neiz an oll a zo seder  
 An eil ouz egile zint cousket dibreder,  
 Mantret eo, sebezet. Guelet a rank Thomas  
 Ar lin abars credi. Deuz kern he voned glaz  
 Etenneur c'hoz corn pri, ber-ber, deis ar peur-zourn,  
 Varlene dezan coan e cuezas euz he zourn.  
 En eur vlagen guechall e Landerne prenet  
 Evit mont d'ar pardoun da zibab ar plac'h coant  
 A roas dezan furnez eb leve nag ar c'hant  
 E zeus eun tam butun gant deliou seac'h mesket ;  
 Pa vez skuiz e cav c'huek eur bouilladig moged,  
 Mæs annaïc ar Bureau zo ker bian he foueziou !..

E pleg ar c'hleuz e cuz vit goelet doareou  
 Ar vam eurus tec'hed dious ar sparfel naonek.  
 Grik ebet er vojen, ne vel ozac'h na grek  
 O tostaat. Gouscoude 'pad m'ac'h oj var he veud  
 Ludu he gorn butun, dre zeliou ar c'heuneud  
 E clez eur fourralen hag ar gliz o cuezas,  
 Ema ar vam en neiz : d'he re vian da genta  
 Peb a damic, goude teu tro ar vinoret  
 N'ancounac'ha hini, hini ne dilezet.  
 Diou ar pardaez pa vel chimal he lochenn  
 O vogedi, liger a sederroc'h he benn  
 E za d'he amezec da gounta an histor  
 « Va mignoun, eme Yan, er pron eus ar gador  
 Aliez hor persoun coz en deuz deomp lavaret  
 E silaou ato Doue peden he vignounet,  
 Hor c'har kuitibunan evel he vugale,  
 Ag e peuz difizians, den diskiant, dizarle !  
 Bremaic var da varlen Yannik vian azezet,  
 Kenavo gant Yannik peoz guil an ved ailet,

Daoust piou zo par d'he dad e Leon ag e Treguet  
 Ar bleis e toul an or gant an naoun o yudal  
 An tan ag ar gurun, Caer o desse Crozal  
 Ne spountet ket Yannik. Yannik zo difennet  
 Etre divreac'h he dud ouz an oll draou crouet.  
 Sell, va mignoun Thomas, ni zo oll yannikou  
 Cousket evel Saint Yan var galoun ar Aotrou  
 A fell dezhan ganeomp beza galvet hon Tad.  
 Tol da zourn em hini a greomp eur marc'had,  
 Mar teu car an ankou d'as kerc'hed em raog-me,  
 Me gemero da blas a gant va bugale  
 Da re vezo savet, me labour 'gis daou.  
 Ma renkan da genta losker va relegou  
 Da vaga ar prenev, neuze kemer sourci  
 Deuz va bugaligou, deuz kement zo em zl  
 A mar deomp assambles da velet petra bouez  
 Ar skuider, ar c'huezen, ar boan, ar baourentez  
 E balans an Dreindet, pell abars ma c'hello  
 Daouarn hor mab cossa trei glasvez an hevo,  
 Guell aze !... Var hor lerc'h ne vint ket dilezet  
 Rag ho zad vo neuze tad an oll vinoret  
 Neuz a bar d'he c'halloud nemet he garantez  
 An hini var hon daoulin a zaludomp bemdez  
 « Hon tad pehini zo en Env. »

Yan GOLAS.

**Eur républikan o vervel.** — N'eus  
 ket gwat bell, e varve, en hor bro  
 Franc, eur mear républikan, keuz bras  
 dezha, mæs keuz divezat siouas ! da  
 veza bet heuillet ar republikanet epad  
 he vuez.

Cetu ama, tost davad, ar pez a lava-  
 re da gement hini a iea d'he velet. Eur  
 gentel eo evit meur a hini all.

« Spountet oun, emez ha, o sonjal er  
 gount em bezo prestic da renta da Zoue !  
 Nac a vad enn bije ghellet da ober ha  
 n'em beus ket great ! nac a zrouk em  
 bije ghellet da viret hac em euz lezet  
 da ober ! Eun dra zo dreist-oll hac a  
 laka ac'hanon da grenna araoc mon  
 dirac va barnar : Betec hen ne selle ket  
 d'in kredi oa eur pec'het beza republi-  
 kan, pe *liberal* evel a lavar lod ; mæs  
 hirio, ous sklerijen ar bed all, e velan  
 ervad eo kement-ze eur pec'het hac eur  
 pec'het eus ar re c'hoassa, rac nac a  
 zrouk ne rank ket da ober an hini enem  
 laka e renk ar republikanet a zo hirio.

N'em euz bet morse kassoni ebet nac  
 ous Doue, nac ous ar religion nac ous  
 ar veleien, hac evelato, o veza ma zoan  
 republikan, e ranken atao enebi outho,  
 dindan boan da veza torret eus va  
 c'harg, ha da dremen evit eun trubard  
 dirac va c'honsortet.

Evel Pilat, em euz condaonet ha  
 taolet er meaz eus ho ziez ar freret hac  
 ar seurez, eb kaout abeg ebet enno,  
 skol vad a reant, den ne glemme anez  
 ho, n'euz fors ! ar cheffou bras a c'hou-  
 lenne ouzin ho c'has kuit, er great em  
 euz, hac hirio ar gommun a zo karget  
 a zle evit paëa *skolaërien laik*, n'oa  
 izom ebet anezho nemet evit dis c'hri-  
 zienna ar feiz eus a galonou ar vugale.

« Ouspen-ze voti eun euz great ha la-  
 keat re-all da voti evit deputeet ne fell  
 dez-ho kaout na belek na leanez ebet  
 vardro hor soudardet hac hor martolo-  
 det. Nac a hini siouas ! a zo marc  
 evelse haca varvo c'hoas eb sacraman  
 abalamour din ! Penaos e c'hellin-m  
 dirac trôn an Autrou Doue beza par  
 donnet evit kement-ze ! Goude beza be  
 penn-kaoz eus a zaonation kement all a  
 dud, penaos e c'hellin-me beza salve  
 va unan ?

Ha divezatoc'h ma teu hor bro gei  
 da rankout haya eb belec nac iliz, m

E pleg ar c'hleuz e cuz vit goelet doareou  
 Ar vam eurus tec'hed dious ar sparsel naonek.  
 Grik ebet er vojen, ne vel ozac'h na grek  
 O tostaat. Gouscoude 'pad m'ac'h oj var he veud  
 Ludu he gorn butun, dre zeliou ar c'heuneud  
 E clev eur fourraden hag ar gliz o cueza,  
 Ema ar vam en neiz : d'he re vian da genta  
 Peb a damic, goude teu tro ar vinoret  
 N'ancounac'ha hini, hini ne dilezet.  
 Dious ar pardaez pa vel chiminal he lochenn  
 O vogedi, liger a sederroc'h he benn  
 E za d'he amezec da gounta an histor  
 « Va mignoun, eme Yan, er pron eus ar gador  
 Aliez hor persoun coz en deuz deomp lavaret  
 E silaou ato Doue peden he vignounet,  
 Hor c'har kuitibunan evel he vugale,  
 Ag e peuz difizians, den diskiant, dizarle !  
 Bremaic var da varlen Yannik vian azezet,  
 Kenavo gant Jannet poas suil ar yod silet,  
 A vezo dizourri dispount a dibreder ;

---

Feuilleton du **COURRIER DU FINISTÈ**

15

Samedi 6 Septembre 1890

---